

(310)

Guerz neverz  
 En enor ha gloar ar c'habiten Cozanet,  
 eus a Lezardres, tost da Landreguer.  
 Pehini en deus bet ar boner, dre e gourach vias, da savetai o bue  
 da 198 passager Sautz en eur vatimant e pehini voa croquet an tan.

1841

Var ton Guerz Santez Anna Vened.

Tadou, mamou, bugale, c'houi dreist oll, Bretonet,  
 Oc'h eus etoues tued a vor gerent pe vignonet,  
 Prestit hoc'h attention, en hano a Jesus,  
 Da zelaou gant eves bras eur recit truezus.

Tost d'ar guer a Landreguer, e geric Lezardres,  
 Eus eun hano hirio 'n deiz hac en devo ecleo;  
 Beza e deus an enor da veza enni ganet  
 Exempl ar Vartoloded, ar c'habiten Cozanet.

Pantiet eus an Haur-Neve d'ober eur veach pell,  
 Lancet e creiz ar mör bras, poulset gant an avel,  
 Equis eur giür gabiten hac un den leun a gourach  
 Ec'h evessaet meurbet e lestr, e equipach.

(311)

Un devez, en eur zellet ebars e longueru,  
 Eus a dribord da vabord gant eves a bep tu,  
 Hac én remercout pell bras eur poent rus evel an tan;  
 Ractal e reas cingla da errount buan.

E lagad flem en lacas neuze incontinant  
 Da remercout e voa 'n tan ebars eur vatimant  
 Hac én crial a boez penn: courach, courach, mignonet!  
 Nijomp da zouguer sicour equis giür Bretonet.

Rentet tost d'ar vatimant voa e flam hac e tan,  
 Er hanavejont diouc'h-tu gant nebeut eus a boan  
 E voa carguet a Sautzon o vonet d'an Enezi:

12

Un horrol e voa clêvet an estlam hac ar c'hri.

Eur spouron eus ar goassa a voa en equipach;  
An disesper horrerus o c'hargue a arnach;  
An tan adreus hac ahed voa croquet er vatimant;  
Eur maro cri a velent eno incontinant.

Ar goerniou voa oll carguet eus an dud maleurus,  
An eil var quein equile, en eur stat horrerus;  
Darn all a voa cramponet el lec'h ma ellent cregui,  
O sonjal tec'hi demeus eur maro meurbet cri.

Pa dosteas Cozanet eus al lestr anflamet, (312)  
E voa eur spont o velet an tan hac ar moquet;  
Mes gementie n'ampech get hor Breton d'e gramponi-  
Ha d'en em lagat e stat d'ellout n'em assuri.

Ar c'habiten Cozanet a saill er vatimant,  
Hac a vel un dra horruhl eno bars en instant:  
Eur vreg voa er c'hobanou, a blonje, a ziblonje  
Dre rouli ar vatimant; pequer spontus voa se!

Eur buguelic voa crapez gant nerz eus e gouzoug,  
Daou all sindan e divrec'h a vire ouz peb droug.  
Ar c'habiten Cozanet a saveta anezo,  
Hac o disgen gant calz all en e vreg voa eno.

Ar vreg a voa leun avoalc'h; pried ar vreg salvet  
A glasq antreal er vreg, mes re e voa carguet.  
Adieu, greg ha bugale! me zistro d'am batimant  
Da vervel o sonch ennoc'h bete coll santimant.

Nan! nan! eme Cozanet, nevo get lavaret  
Eo eur martolod Breton en deus ambandonet  
En danger eus ar maro un tad tener, un tad mad:  
Hac e kfeñ-me mervel, me rang ho savetat.

Benediction Doue ra deuy var Cozanet (313)  
Ha var gement crouadur a vo outan ganet!...  
En zo un haros christen, enor eus hor Breiz-Izel:  
Ra vo rentet da vigen e hano immortal.

Graç da gourach Cozanet, savetet eo an oll :  
 E gonfianç en Doue ha na zeu den da goll.  
 An oll sauzon zo rentet e batimant Cozanet,  
 Da drugarecat Doue int en em unanet.

Guelet a rejot eno ar joo, an drugarez  
 Eus an dud savetet, leun a anaoudequez  
 En andret ar Francisien, pere, eus a bep amzer,  
 Zo prest da zouguen sicour d'an oll e peb danger.

Conta a rejot diouc'h-tu an dud voa savetet :  
 Cant trivac'h pèvar-ugent neuze a voe cavet  
 Etre goaset ha graque, yaouanc, côs, bras ha bian :  
 Dre ar c'hrac eus a Zoue, ne vange qet unan.

Buan, eme Cozanet, d'an tan ar chaudiere,  
 Ha vo prest d'an dud qez-mâ bara, qig ha souben !  
 Roit de eur banne guin da nerza o c'halonou.  
 Pequen eurus ouñ hirio, ô jesus, va Autrou !

(314) Allon, autrou 'r medicin, pansit ar re vlesset,  
 Ha c'honi, va mignon second, hastit ma vint quisquet.  
 An oll gouffrou zo scarzet, peb martolod n'em ampres  
 Da rei o dillat caera da c'holo an dud qez.

Allas ! itronezet qez, n'hon eus na rubanou  
 Na plumach, na tecou ze, nae ive robeou :  
 Dalit hor brava dillat ; het e campr ar c'habiten  
 Vit en em vouisca tranquil, ma voc'h brao ha qempen.

Ar c'habiten Cozanet incapabl da ellout  
 Miret qement all a dud, a chenchas prest a rout ;  
 Gant ar guilla bolonté, na elje qet fourmissa  
 Boud avoalc'h d'an oll dud - se evit dont d'o beva.

Anruout a rejot souden e Rio-Janeiro ;  
 Ar sauzon a voa eno a zired trio vardro,  
 Hac a zistribu arc'hant d'ar vartoloded a Franç,  
 E merq a anaoudequez hac eus a recompanç.

Da Cozanet e rojont eur montri aour ar c'haera,

Ha da Rouanez Bro - Sauz ractal voe grêt scrifa .  
 Officier ar Rouanez neuze 'lavaras dezã :  
 Grit ho cont , paest verzo an diner divea .

Ar Saizon a rayo sur evidoc'h o dever ;  
 Sonjal 'rint en Cozanet atao e peb amzer ,  
 Ha n'ancounac' hint bigen pequeument oc'h bet humen  
 En andret o c'henvrois , ouz se bezit certen .

(315)

An oll bultinou a Franç hac eus ar vroyou all  
 O deus comzet gant enor demeus an den leal  
 Pehini a vo atao sellet evel ar giir scoier  
 Deus an dud vaillant a vôr dre oll e peb amzer .

Autrou 'r marichal Grouchi a zo en em hastet  
 Da rente ive hommach d'exempl ar Bretonet,  
 O rei un taç alaouret hac eur vedaillen ive  
 Da Cozanet en offranç eus memprou ar pence .

Mes ne meus get c'hoas achu . Comzomp ouz hon Roue ,  
 Bepret leun a vadelez evit e vugale ,  
 Ha prest da reco[m]pansi an actou eus a vaillanç ,  
 Gant eur soign eus ar vrassa servicherien ar Franç .

Quelet a ra sclêr patant burzudou Cozanet,  
 Ha gant eur joa ar vrassa en deus - an en hanvet  
 Dioc'h - tu dre batanten membr legion a enor ,  
 Hac e cass dezã neuze ar groas vit en decor .

Ministri eus an dud a vôr , an autrou Duperré ,  
 Lorguet eus a quementse eus a bers ar Roue ,  
 Zo e galon treantet eus a admiration  
 O tout da recompanci Cozanet , giir Breton .

(316)

E galon gant eur joa vras a zaille en e greiz  
 O tonet da zecori Cozanet , haros Breiz ;  
 En voe ive martolod , goeachal hep nep soiez ,  
 Vel an amiral Laland , député Montroulez .

En eur veuli Cozanet demeus e oll gourach ,  
 Ec'h admiromp a galon ivez e eqipach ,  
 Rac oll o deus grêt preuven demeus a humanité ,

A lealded, a feiz vad, a generosité.

En amzer demeus ar peoc'h, coulz evel er brezel,  
Eo bet dign a veuleudi tud a vör Breiz-Izel:  
Atao o deus soutenet, evel güir tud a galon,  
Gant eur enor ar vrasa enor hor pavillon.

(317) Enor da vartoloded hor brö quer Breiz-Izel,  
Pere voe e peb amzer d'hor pavillon fidel;  
Eur vör gaer vel hon hini na ell nemet fournissa  
Tud leal, tud generus hac ar c'hourajussa.

Na achuimp get hon güerz hep donet da deurel  
Eur fleuren var hanoyou omp fier da henvel,  
Var tud a vör eus a Breiz, enor rouantelez Franç,  
Hanavezet dre 'r bed oll dre ar brassa vaillanç.

An Aubrionne Primoguet, Cassard, Duguai-Trouin,  
Guichen, Cornic, Ducouedic, Bisson ha Tremintin.....  
Mes re hor be da henvel, ma clasqfemp comz oute oll;  
Daoust d'hon oll bolonte vad, hor memor en em goll.

Eur Prinç, eur mab d'ar Roue, yaouanc, leun a enor,  
Ne voa c'hoas nemet buguel p'en deus redet ar mor,  
Hac en deveus disqueuzet d'ar Franç oll a betra voa  
Capabl dre e vaillantés, dirac Sant-Yvan d'Ulloa.

Gloar ra deujo da vigen varnezo da bara,  
Ni dreist oll, Breiz-Izellis, ni zo just deomp renta  
Hon hommach a greiz calon da harozet hor mam bro:  
Bezomp oll dign diouto betec heur hor maro.

(318) Enor ha gloar da Zoue, pèni ra e peb lec'h  
D'e oll vugale santout ar pouvoar eus e vrec'h,  
Evit allout n'em sellet evel ma tle güir breudeur,  
Ha renta o oll zicour pa güerzer er maleur.

O martoloded christen! ho pet atao ervad  
Ar sonch eus a Gozanet dirac ho taoulagad;  
Ha ra blijo gant Jesus ho qervel evit repos  
Er fin demeus ho puerz e gloar ar Barados.

A. Lédan.